

SON AR BUTUN

Var ton : Michel Noblet pe Chanson ar gommerezet

Eu o toues, Bretoned
Me gred n'en deus nicun
Ac e fachfe ô clevet
Parlant eus ar butun
En Breiz-Izel ar voarset
A zo oll fumerrien ;
Ar gragez hac ar merc'het
A zalc'h tabatierien

Eun den havet HERMANDES,
Eus ar Spagn guinidic,
O vea ed eun deves
Betec an Ameriq ;
En enezen Tabago,
Breman zo tri c'hant vla,
A zizloas eno
Plant butun da guenta.

Digas a ra d'he vam-bro
Orzennou grêd ractal ;
Eus nebeut eus anezo
E ro d'har Portugal
Eus ar belec'h Yan Nicol
Cannat er roue Franc
A zistroas gant carot
Ha roll en abondañç.

Itonezet ar Pales,
Couls hac ar peanou bras
Demeus hon rouanteles
Souden a estonas,
Pa veljont butun laket,
Gant eun hast ar brassa,
Da ober cranch a moget
Ha da lakat stréfia.

Mæs kercent an dud gueziec
A commanças c'hoari ;
Caout a rejout mil abec
Er butun corn a fri
Muducin ar Rouanez,
Vit plijout d'e itron
A lavares eun deves :
Ar butun zo poeson.

Cals eus a dud ignorant
Var ar mæs hac en kêr
A grede voa eur presant
Roet gant Lucifer,
Ar Pab, a ben seiz sizun,
Couls hac ar véleyen
A loscas var ar butun
An excommunugen.

An doctorat importun
E claeq diminou
Customou fal ar butun,
O lèkas da greski ;
Rac an oll labourerien
A deus a'ho goapat
En eur vrassaat ar chiken
Couls hac ar c'horniedat.

Goude cals a jolori
Ha meur a obaden
E commanças c'hoant fumi
Antreal ea o fen.
Neuze oll e commanchont
Derc'hel melin pe forn ;

Eu o godel e touchont
He eur vœst pe eur c'horn.

Ebars er Franc, marize
E zeus meur a gillen
Pere c'hoas a relusfet
Kemeret eur brisen
Mæs biken eur guir breton,
Na greg coant, na plac'h flour
Ne vo, a greiz e galon,
D'har butun adversour.

Butun zo ken necesser
Evel ma zè ar boued ;
Meur a zen eus ar c'hartier
A jomfe zur eb preb
Quentoc'h evit eb butun,
Ar brassa fumerien
N'è ket an dud a fortun,
a ses sious l ar beorrien.

Ar mêvier a vez dillat
Evit caout da eva ;
Ar paour evit butunat
Zo kasi memeus tra.
Guelet a rêr avichou
Eun tam cos paganat
O rêi betec e bilou
Evit eur c'horniedat.

Remerki a rêr brema
A falla mic'hiee.
Eur c'horn brassoc'h evitan
O vranckel en e veg ;
Er scol neus allet diski
Nemet e VE ha BA,
Mæs er skian, da fumi
E zè ar savanta.

Neller ket gouscoude
Disprijout ar butun ;
Eur c'horniedadic bembe,
Deus ar mintiu var yun,
A scanva cals ar bilou,
Hac a gass kuit ractal
A boan den, goel humoriou,
Kercouls hac an er fall,

Ar butun zo eur mignon
D'an den zo e unan ;
Pried eur vreg dirèzon
A gonsol en e boan ;
I'pa vel manch ar scubèlen
Prest da von var e choug
E lak tan var e biben
Hac e ya en e roud.

Potret yaouanq delicat,
En oad d'ober al lès
A blij dèze butunat
En kichen o mestres ;
An draze zo direspes,
Eun amoureux poli,
Dirac e muia care
Ne glefet quiet fumi.

Amzer zo bet yan zoudard
A vije diou zizun
O testum pèvar liard
Evit prenan butun.

Mæs an oll a vo contant
Brèman da zervicha,
Pa ro ar gouarnament
Butun evit netra.

Sellit eus ar martolod,
O font d'e vatimant
Gant pourvision carod,
Ha cigarennou coant.
Neus ket douçoc'h evitan
Bopret e ve laouen ;
Mæs diouallit dioutan
Pa lako eur chiken.

Butun poult so d'ar merc'het
Excellent hac util ;
Mad e deus ar c'hoant kousket ;
Ha ca zigas barbil.
Ober a ra tud savant,
Rac ouspèn tri c'hant den
O deus cavet o skiant
En eun d'abatierien.

Pa deu d'ar plac'h coz-viret
C'hoant da vent en fortun,
E tenn dirac ar botret
Eur voest leun a vutun ;
Neuze ar c'henta ini
A deuyo da guemer
Eur brizennic diganti
A vo e zervicher.

Deut è ar c'his da voarset
Da gaout tabatieren ;
Mæs ive cals a vèrc'het
A blij de ar biben.
Eur vureden alaouret
A stribil eus ar tri
A zo ken caër da velet
Ac eur c'horn o lumi.

Ar butun zo eur remed
Da lakat distèli ;
Purvuia ve implijet
Eus ar boan izili,
Ann oll a brofit outan,
Ar pez so guelloc'h c'hoas ;
Eiz cant mil den divarnan
A c'honit o bara.

Mont a ran, va mignonet,
Brèman da èhui,
Mar oc'h eus c'hoant da glèvet
Piou e zè an ini
En deus grèt ar ganouen ?
N'è quet divar ar mæs ;
E hano zo PÈR DERRIEN
Eus a gær Montroules.

FIN.

P. DERRIEN.

(Propriété de l'Éditeur).



CHANSON NEVE

Composet gant ar Cloarec, evit disquez ar vantr-calon en eus santet eus a zemezi e Vestres

Var ton : *Malgré toute la tendresse.*

Pebes qêlou, ô, va Dêue.
A meus hirie recevat !
Va mestresic, va c'harante,
A glevan so danaset ;
Va mestresic, va c'harante ;
An ini garrien muia,
Hê pa sonjan en qementse,
Va c'halon a ven ranna.

Oll blijadur ou an natur
A so echu evidon ;
Echu e sê ar blijadur
A davee va c'halon ;
Echu ê ar gontantamant
Am boa ebars er bed-man :
Foêi d'an aour ha foêi d'an ar hant,
Eneb guis n'o désiran.

Me a garfe caout eur matier
A guement a ve capabl
Da renta va c'halon seder,
Da sec'hic va daoulagad,
Da rejouissa va c'halon,
Da gontanti va soeret,
D'am lemel a affliction
Ha da rei din ar yec'het.

Mes quementse so incrédabl,
Ha ne arruo biquen ;
Me so muia miserabl
Eus an oll grouadurien,
A meus collet en un instant
Ar froues eus a bamp blaves.
Er un gol va c'hontantamant,
Va flijadur, va mestres.

Adieu eta paros Plestin !
Adieu tud ar gonsequanç,
Me a meus cavet va chagrin
E mesq ho rejouissanç ;
Me meus ho c'heuillet gant doster,
Me ho quita gant glac'har,
Heavel dimeus un dursunel
A ve privet eus e far.

C'houi hoc'h eus grêt va flijadur,
Va joa, va c'hontantamant ;
C'hui a ra va displijadur,
Va anquen, va nec'hamant :
E mesq ar ros a embrassen
Ha va oll delection
Me a meus cavet un dresden,
Hac a biq cals va c'halon.

Mes breman me gred en guirion
Reson an dud babilla,
Penos e c'heller caout poêson
E mesq ar suc an doussa :
Ha dindan ar fleuriou caëra
A'ies e ve coachet
Aspicou ar re gruella,
Aêret-guiber, serpentet.

Rac se eta, me ho suppli,
Ia, dre ma ho caraç,
Na deut james da reposi
Elec'h ma vefet bravan ;
Rac ma c'hêru eneb goaleur
Da ober dêc'h diblassa,
E veso tristoc'h ho malheur
Ha diessoc'h da usa.

Evit test eus a guementse.
Va breudeur, a ma c'hoarset,
C'houi pere am anavese
N'oc'h eus met dont d'am guelet,
Ha pa vefet ar chenchamant
Pini a so deut ennon
C'houi a brouvo certenamant
E se touchet va c'halon.

Diaroq me a voa en vel
Eus eur rosen florissant ;
Va c'halonnic b'pred seder,
Carguet a gontantamant :
Ar joa pintet var va diou chot,
Va daoulagat qer laouen,
Ma soujen, dre ma voen diot,
N'am bije glac'har biquan.

Hoguen, ma em gaelfec'h brêman
Ebars em daêlou bæuset,
C'houi lavarfe : ne qet eman
Hon boamb ni anaveset ;
Ennes a voa gyê a galon ;
Eman a so contristet,
Ennes a voa un den migaon,
Hac eman sur n'en deo qet.

Allas ! eo sur, va migaonet,
Me so ar memes ini,
Mes biscoas ne gavis sujet
Voe capabl d'am glac'hari ;
Bremant me meus cavet un
Hac a glac'har ve c'halon !
Ha pa po clevet anean,
E'h estenfet gant reson

Pa voan mæ ebars em jardin
O contempli va fleuriou.
Va c'halon, exant a chagrin,
Va daoulagat a sêêlou,
Ha me c'êvet un alc'hoêder,
A us va fen o cana :
Ad studium te confer (1)
Nam nubta est amica,

Ha me o vonet d'am godel ;
O tenna ma fistolen,
Had ho tiscar an alc'hoêder
D'an traon demeus ar vesen,
Rac gollo velse o bue
Qement en deo ar galon
Da sonet da annonç din-me
Ar sort desolation.

Mes pe glêvit-u qement-ma
A c'hinou eur messajer.
Otramant, clêvet anean
Eus a veg un alc'hoêter,
Oblijet on bet d'e glêvet
Ebars em brassa glac'har,
Ha sêtu ase ar sujet
Ma tesiran an douar.

N'eus mui a gonsalation
Evidon bars er beb-ma,
Neus nemet desolation,
Tourmanchou ar re vrasa

A ve réservet evidon
Goude bea re garet,
Mes me vo furroc'h da viquer
Ha ne garin den ebet.

P'am eus fraillet ar chadenne
Gant pere oan amaret,
Pa meus brusunet al lassou
Gant pere voant liamet ;
Pa ê demeset va mes' res,
Me guemero an habit,
Ha me vesan recoles,
Certen me a vo hermit

Mes gouscoude, p'en em souj
Ha pa ran reflexion,
Ur rançoq goela
Ha derc'hel trist e galon ;
Uu hermit beva retiret
Hac ep nep plijadures,
Qement-se oll so re galet :
Ret ê din choas eur vestres,

Mes pelec'h caout eur guir ve
Ar bed-man a so malic,
N'am eus q-t esom danseres,
Nac unan a garo guin ;
Diaroq me voa difcil,
Mes breman pa on trompet
Me a vezo muioch subtil
Pa gouversin gant merc'het.

Mes anaout ran eur fumelen
So dign a attation,
Onnes a vo da virvigen
Rouannes eus va c'ha on ;
En onnes ê ma va fianç,
Onnes ê va c'harante,
Eoni e man va esperanç ;
Hi ê sourcen va bue.

Evelse un den glac'harot,
Evit en em gonsoli
A dle alies lavaret
Da basseal e annui :
Mar deo serret an nor-se,
Unan al a sigoro,
Me a vo bepred er souj-se,
Hac a vo botec ar maro.

Ma tesirfac'h, ma mignonet
Gout'hano ar c'homposer
Guinilic ê a Locquirec,
Mab ena d'eur guader,
A so n'em laqet er studi
Bars er guer a Vonrtoules,
Hac a so breman disourci,
P'e dimeuset e vestres,

Evit soulaji ar c'haner,
M'o supli, assistantet,
Da rei desan pep e siner
Evit eva d'ho yec'het,
Oramant, prérit ar chanson,
Pini he deus ar pouar
Da rejouissa ar galon
A greis ma ve en gla'har.

(1) Da lavaret ê, en em ro d'ar studi, da vestres so demeset.